

---

# ARYORIG

---



*Cliché de la « Bretagne touristique ».*

**I. V. Wir-Zikour, patronez Gwengamp**

---

Rédaction et Administration : 15. rue des Capucins, GUINGAMP

# USINES S'-SAUVEUR

FABRIQUE MÉCANIQUE  
de Pierres artificielles et d'Agglomérés de ciment

PARPAINGS de toutes épaisseurs

BRIQUETTES de ciment. — BRIQUES

PIERRES CREUSES, simples et ornementées

TUYAUX DE CIMENT de tous diamètres

Jean LE FOURNIS

Place S'-Sauveur —:— GUINGAMP

Tél. 1-37

R. C. 3212

ÉTABLISSEMENTS  
**LE JAMTEL FRÈRES**  
GUINGAMP (Côtes-du-Nord) \*  
TOUS ARTICLES de QUINCAILLERIE, MÉNAGE  
MACHINES AGRICOLES



20, rue Saint-Yves

2, r. des Carmélites

R. C. Guingamp 38

ENTRÉE LIBRE

Téléphone 27

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
e embann en « ARVORIG »

# LA NOUVEAUTÉ FRANÇAISE

Grands Magasins de Nouveautés  
LES PLUS IMPORTANTS DE LA RÉGION

## CHARETON-DRONIOU

GUINGAMP, 25, Place du Centre  
SAINT-BRIEUC, 16, Rue Saint-Guillaume

TISSUS EN TOUS GENRES

DRAPERIE — SOIERIE — TOILES

CHALES — TABLIERS BRETONS

CONFECTIONS POUR HOMMES, DAMES & ENFANTS

LINGERIE — BONNETERIE  
CHEMISES — COLS — CRAVATES

GANTERIE — MERCERIE — PARAPLUIES

Meubles — Literie

ARTICLES DE VOYAGE

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
e embann en « ARVORIG »

**L'HOSTIS & LEPREUX**

**Tissus en gros**

— **GUINGAMP** —

**Maison DENIEL**

Bourrellerie — Sellerie  
Articles de sports  
Voitures d'enfants  
25, rue des Ponts-Saint-Michel  
GUINGAMP

**ORFÈVREURIE - BIJOUTERIE - JOAILLERIE**

Beau choix de Bagues pour mariages

**LESCAN du PLESSIX**

10, Place du Centre, GUINGAMP

— MAISON DE CONFIANCE —

Ancienne Maison ROCHETIE

**CLOAREC**

CHARCUTIER

1, rue des Ponts-Saint-Michel  
GUINGAMP

**EPICERIE DE CHOIX**

**Y. LE GUEUT**

Rue Saint-Yves — GUINGAMP

**VINS & SPIRITUEUX**

Pâtisserie — Confiserie  
Glaces et Sorbets  
Pièces montées — Entremets

**Félix PINSON**

12, Place du Centre - GUINGAMP

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

**Vins et Spiritueux en Gros**  
Vins de Messe

Mme **LOUIS LE CLECH**

4, rue du Grand-Trotrieux  
GUINGAMP

**Epicerie Centrale et Parisienne**

**LE PERRON & MEUDIC**

Correspondants de la Maison Félix POTIN  
29, rue des Ponts-St-Michel  
GUINGAMP

**LE CUN**

Pharmacie

Optique — Photographie  
Place du Centre - GUINGAMP

**PEINTURE & VITRERIE**

**CH. THÉBAUT**

25, rue Saint-Yves - GUINGAMP  
Grand choix de papier moderne

**JULIENNE Frères**

**TISSUS EN GROS**  
GUINGAMP

**CHAPELLERIE & MODES**  
CASQUETTES D'UNIFORMES

**ROBILLARD**

19, Place du Centre, 19  
GUINGAMP

**Chaussures en tous genres**

**F. DESGRANGES**

21, Place du Centre, 21  
— GUINGAMP —

Dilhada Danve  
evit potred ha merc'hed

**LE FRIEG-KERLEAU**

Tost d'an Iliz  
**GWENGAMP**

**INSTALLATIONS ÉLECTRIQUES**  
Force et Lumière - Moulins et Villas

**J. DUCHEMIN**

Ingénieur-Electricien  
30, rue Notre-Dame, GUINGAMP  
R. C. 3232. Téléphone 0-91.

**Ornements d'Eglise**

Bronze et Orfèvrerie  
Atelier de dorure et d'argenture

**G. LE POUULLOUIN**

12, rue de la Trinité, GUINGAMP

**LELIÈVRE**

**Charbons et Bois**

4, rue de la Trinité - Guingamp

**V<sup>ve</sup> EUDE & LE CUN**

Vins et Spiritueux

Bons Vins pour Noces et Repas

Boulevard de la Gare, GUINGAMP

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

**Maison UNVOAS**

**CHARCUTERIE**

— Spécialité d'andouilles  
Pâté de foie gras —

42, rue Notre-Dame - GUINGAMP

**PÂTISSERIE — CONFISERIE — GLACES**

Ancienne Maison LE BAIL

**MARTINET, Successeur**

43, Place du Centre  
GUINGAMP

**Gros EPICERIE Détail**

**LE DÉRÉAT & BONNO**

6, rue des Ponts-Saint-Michel  
GUINGAMP

**HORLOGERIE BIJOUTERIE LUNETTERIE**

Bagues pour Mariages  
Montres de précision : Omega, Unic, etc

**F. ELLIEN**

45, rue Notre-Dame --- Guingamp  
— RÉPARATIONS —

**Epicerie Vins et Spiritueux**

FRUITS — PRIMEURS

Ancienne Maison GUIDON-CHARETON

**J. POGAM, S<sup>eur</sup>**

37, place du Centre - GUINGAMP  
Télph. 50 Produits de charbon

**LA PREVOYANCE**

ASSURANCES

**Accidents Agricoles**

INCENDIE — VIE

**G. LE CUN, Agent Général,**  
GUINGAMP



# MACHINES AGRICOLES TANVEZ

Moteurs — Batteuses — Manèges — Coupe-Racines  
Broyeurs d'Ajoncs — Hache-Paille

## MATÉRIELS DE CIDRERIE PERFECTIONNÉS

Derniers Concours } LAIGLE 1924, 1<sup>er</sup> PRIX, Médaille de Vermeil  
                                LISIEUX 1923, 1<sup>er</sup> PRIX, Médaille d'Or  
DIPLOME D'HONNEUR de l'Association Française Pomologique

## TRIEURS DE POMMES DE TERRE « MÉLIOR »

Derniers Concours } VERSAILLES 1922, 1<sup>er</sup> PRIX, trieurs à bras  
                                REMY (Oise) 1923, 1<sup>er</sup> PRIX, trieurs industriels

# USINES TANVEZ

Société Anonyme au Capital de 1.500.000 Francs

“ La Tourelle ”     Registr. du Commerce     **GUINGAMP**  
  n<sup>os</sup> 100 et 1260

## An holl dilhad

*evit ar botred hag ar vugale*

— A L A —     R. C. Guingamp 2.926

## “ Grande Fabrique ”

41, rue Notre-Dame, **GUINGAMP** — & — rue Gambetta, **ROSTRENNEN**

— A —     — A —  
‘Paris-Tailleur’     ‘Paris-Tailleur’  
Place du Centre, **LANNION**     TRÉGUIER

Marc'hadourez vat ha marc'had mat

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « **ARVORIG** »

## H. JAN

CHIRURGIEN DENTISTE

Reçoit les *Mardi, Mercredi, Jeudi*, à **LANNION**  
*es Lundi, Vendredi, Samedi*, de 9 heures à 5 heures

37, Place du Centre -- **GUINGAMP**

**BOIS**  
du Nord

**PICHON**

Petit-Paris  
**PLOUMAGOAR**

Fruits, Epicerie, Primeurs  
:: Bonbons Fins ::

**JÉGOU - LE PAGE**  
50, Rue Notre-Dame - **GUINGAMP**

Spécialité d'oranges :: Dépôt d'huitres

## Hippolyte URVOY

\* CYCLES \* MOTOS \*

33, Rue Notre-Dame, 33 -- **GUINGAMP**

VEND  
ACHÈTE  
RÉPARE

des Bicyclettes de toutes Marques  
et de  
toutes Provenances

GRAND CHOIX DE BICYCLETTES ET D'ACCESSOIRES  
Garantis des meilleures Marques et des meilleurs Prix

LOCATION     **URVOY**     D'AUTOS  
                                *Cycles*

**GUINGAMP**

Téléphone 1-48

22 AU BON ACCUEIL 25

## BOGRAND Frères

En Face de la Poste -- **SAINT-BRIEU**

An holl gwiskamanchou hag an holl danve  
Bretoned ! E ti BOGRAND e kaver marc'hadourez vat  
ha marc'had mat ; et da welet !

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « **ARVORIG** »

R. C. Guingamp 363

R. C. 102  
  
R. C. 101

R. C. St-Brieuc 441

# ARVORIG

**Kelaouenn vizek Treger ha Kerne**

**Rener : E. AR MOAL, Coadout**

*A voul bep miz soniou, marvailhou, istor ar Vro, helennadurez war ar relijion, war al labour-douar, etc...*

**PRIZ : 2 skoed** ar bla evit Breiz, adalek Genver 1924.

**Arc'hant ha koumananchou a ve digemeret**

**Administration ARVORIG, 15, rue des Capucins, GUINGAMP**  
N° Cheque postal 44-88, RENNES

## Skrivagnerien :

Draskik. — Barz Mene-Bre. — Abad Joanno. — Gab Liskildry.  
— Kloareg ar Wern. — Eur Mignon kristen ha breizad. —  
Y. M. G. — Yan Grenn. — Tadig. — An Eün. — Didicho.  
— Pêtr Juluen. — E. d'Herbais. — Ar Yeodet. — Karevro. —  
Eur Mestr-skol kristen. — B. L. — Mabnoni. — Digabestr.  
— Roc'hlan. — J. C. — Pendero. — Evnigarvor. — Skrilh  
Mene-Bre. — E. Kerou.

**Skrivagnerien goz maro aboue ar brezel (1914-1923) :** LOEIZ  
PORZ-IREL. — MELIAP. — A. PORZER. — LAQUIE. — GWELTAS.  
KOULMIG ARVOR. — M. COTTIN.

N. B. — *Al labouriou a dle bean digouee! gant ar rener 'benn an 20*  
*da voutan er miz warlerc'h.*

# BANQUE DE BRETAGNE

Société anonyme : Capital 15.000.000 francs

**Siège Social à Rennes**

R. C. Rennes 56

**Agence à Guingamp, rue Saint-Yves**

**Bureaux à PONTRIEUX et CALLAC**

Toutes opérations de Banque et de Bourse



**Délivrance de Bons de la Défense nationale**

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

13<sup>e</sup> BLAVEZ

Niverenn 7

MIZ GOUERE 1925

# ARVORIG

**Kelaouenn Vrezonek Treger ha Kerne**

**TOLENN AR MIZ.** — An Otrou 'n Eskob e vo e Gwengamp. —  
Komite Bleun-Brug Treger-Kerne-Goelo da Otrone Personed.  
Goueltoù Bleun-Brug Gwengamp : Kenstrivadegou ; Program-  
me ; Konkour Koulmig Arvor. — Eured Janedig. — Pirc'hi-  
rinaj pôtrek eskopti Sant-Brieg en Lourd, EDR PIRC'HIRIN. —  
Santez Trifina, A. JOANNO. — Eun oferen neve e Priel, POTR  
JULUEN. — Buhe Breuriez ar Brezoneg, MIGNON AR VUGALE.

**Levriou red evit ober  
konkourioù ar « Bleun-Brug »**

**Kanaouennoù ar Bleun-Brug 1925**  
16 real

« Breuriez ar Brezoneg »  
4 real

**Mouez Meneou Kerne**  
18 real

E gwerz : 15, rue des Capucins, GUINGAMP  
c/c 44-88 RENNES

Lennet en 'Arvorig miz est,

Ouspenn ar pezh a zello ouz

**GOUELIOU AR BLEUN-BRUG,**

*Ouz piou e tleomp-ni senti? gant Didicho.*

*Evel « Ninon », sôn gant G. Tanguy.*

*Eürusted an den dall (d'Evnig Penn-ar-c'hoad), gant An  
Eün.*

*Galvadenn Bretoned an « Touraine ».*

*Prosez bras etre ki ha kaz.*

*Breuriez ar Brezoneg e Paris*

Hag all.

## An Otrou 'n Eskob a vo e Gwengamp d'an 10 a viz gwengolo e penn gouel ar BLEUN-BRUG

An Otrou 'n Eskob en deus bet ar vadelez da gas da rener ar *Bleun-Brug* al lizer-man da rei d'ean da anaout e teuo da Wengamp, da ren gouel ar *Bleun-Brug*, an 10 a viz gwengolo.

EVÊCHÉ DE SAINT-BRIEUC  
ET TRÉGUIER

Saint-Brieuc, le 11 juin 1925.

CHER MONSIEUR LE PRÉSIDENT,

*Je n'aurai pas la joie de pouvoir présider votre Congrès dans son entier. Les deux premiers jours, je serai au Saint-Esprit, à Saint-Brieuc, et à Broons pour des cérémonies de profession que j'ai promis de présider. Mais je serai bien volontiers votre le dernier jour.*

*Je fais les vœux les plus ardents pour le plein succès du Congrès et bénis affectueusement vos efforts.*

*Veuillez agréer, Cher Monsieur le Président, l'assurance de mes bien respectueux et tout dévoués sentiments.*

† FRANÇOIS-JEAN-MARIE.

## Komite Bleun-Brug Treger-Kerne-Goelo da Otrone Personed ar Rann-Vro

OTRO PERSON,

Setu eta difluket Kevredigez ar *Bleun-Brug* en hon c'horn-Bro Treger-Kerne-Goelo, hag an evnig bihan a zo deut eméz eus ar bluskenn an neus eur pezh penn, met nan eus na korf nag ezel c'hoaz. Dâ laret eo, bean zo en hon Breuriez Renerien, ha ne zo enni nemet Renerien. Oh! kât e vije bet, ben gouzout a reomp, e-touez tud eus hoc'h anaoudegez, gwelloc'h danvez da ober ar penn rak ar penn a dle bean poellet mat.

En gwirione, dalc'het e zo bet kement warnomp hon fevar ken hon deus kemeret ar garg pounner da gas da benn Breuriez ar *Bleun-Brug*, met n'eo ket hep bean

yennet start en hon spered e tleomp harpan hon labour warnoc'h ha war ho kenvreudeur ha, ma zo deut d'imp teod ha pluenn, ec'h eo da c'houlenn diganech zikour ha skoazel.

Kevredigez ar *Bleun-Brug*, meulet kaer gant Eskibien Breiz (1), a denno d'he c'hât kalz a dud, ma roet anei da anaveout en ho parrouz, rak war ho kir, meur a hini a ziredo davedomp, gant hast, da lakât o hano war hon rollou da rei korf ha dioueskel d'an ewnig bihan, d'an alc'houeder keltiek a gaso betek ar Baradoz kan dudius ar Vretoned.

Ar vugale, dreist-holl, na badfont ken gant ar c'hoant da rei o hanoioù da « *Vreuriez ar Brezoneg* » savet evite (2) ha da gaout ive en o farrouz eur Vreuriez hag a rei gante kristenien furoc'h ha Breiziz muioc'h kalonek.

Ha ma tigouefe d'ec'h bean en zonzj da ober epad ar miziou a deu eur gouel brezonek en ho parrouz, da rei d'an dud eun tanva eus tenzorior kaer hon Bro, n'ho pet ket a aon d'hel lâret d'imp; ni rei dirag ho tud eur gôzeadenn diwarbenn hon Breuriez hag a zikouro ac'hanoc'h eus hon gwellan da stourm eneb ar fall, eneb ar gaou a zo breman o c'hedal kenkoulz ar vugale evel an dud vras.

Kement sklerijenn ho po ezomm war an treo-ze holl, *Bleun-Brug*, *Breuriez ar Brezoneg*, Gouelioù miz gwengolo en Gwengamp hag all... skrivet, evit se, hep damant, d'hon Sekretour, an O. Louis Léon, Péder-nec: respont fonnus ha talvoudek ho po digantan.

Abad Y. Brochen, Rener.

A. Boscher (ar *Yeodet*) } eil-renerien.

L. Morice

L. Léon, Sekretour-Tenzorier.

(1) Liziri Otrone Eskibien Breiz-Izel a vo moulet hepdale en eul levrig grêt ispisial evit *Bleun-Brug* Gwengamp.

(2) Ar vugale a gavo en levrig an O. Y. Cozaign, « Breuriez ar Brezoneg », kement 'ra a zo ezomm da c'houzout diwarbenn ar Vreuriez. Kât a ve da brenan, evit 4 real: « A l'Administration d'Arvorig, 15, rue des Capucins, Guingamp. »

## Goueliou BLEUN-BRUG Gwengamp

8, 9 ha 10 a viz Gwengelo 1925

### Kenstrivadegeou (pe Konkouriou)

I. — **KOMZ-PLEN (Prose)**. Klevet ho peus, — ma n'ho peus ket gwelet, — penaos edo an traou war ar méz epad ar brezel bras; ar gwazed galvet da zifenn ar vro; ne jome er gêr nemed ar merc'hed, ar vugale, ar re goz.

Grit, e 2 pe 3 bajenn, eun daolenn eus doare Breiz war ar méz, epad ar brezel. Diskouezit ar merc'hed, ar re goz, ar vugale, o labourat an douar. Poan a zo bet, met al labour n'eo ket chomet da ober.

II. — **BARZONIEZ**. — Sevel eür rimadell farsus, da zispenn eür c'hiz fall bennak a wellit oc'h en em zia en-dro d'eoec'h.

III. — **KENSTRIVADEG AN AOTROU ROUDOT. (Enklask war yez ar vro)**.

Abaoc pegoulz, perak, penos? —

Aberz plou ha petra, eman ar brezoneg o koll tachen en ho parrez?

Penaos diarbenn an droug euzus-ze? —

IV. — **KENSTRIVADEG ARZUR DE LA BORDERIE**. — Grit eun daolenn eus an amzer ma veve Breiz en he frankiz (460-1491); —

Amzer ar Rouaned (460-938); —

Amzer an Duked (938-1491).

V. — **DISPLEGADED**. — Ar pezh a vo da zisplega er bloaz-man eo « Dihunomp », a gaver aman warlerc'h.

VI. — **LENNADEG VREZONEG**. — Evit bugale etre 12 ha 15 vloaz. — Barnet e vezint war eür pennad bennak a lennint e « Feiz ha Breiz » pe « Arvorig ». (Gwelet pelloc'h Konkour Breuriez ar Brezoneg).

VII. — **KENSTRIVADEG AR BREZEGEREZ (Concours d'éloquence)**. Ce concours inauguré en 1921, avec succès, comporte trois prix: un premier de 200 fr., donné par **Feiz ha Breiz**, un second de 150 fr. et un troisième de 100 fr.

Le jury d'éloquence sera présidé, comme toujours, par **M. E. Ernault**, chevalier de la Légion d'honneur, professeur à la Faculté de Poitiers et président de la **Breuriez-Veur ar Brezoneg**.

Le Concours d'éloquence est ouvert à tous les jeunes Bretons de 17 à 25 ans, sans distinction, quel que soit le dialecte dont ils se servent. En l'honneur du 60<sup>e</sup> anniversaire du **Feiz ha Breiz** et du 20<sup>e</sup> anniversaire du **Bleun-Brug** nous dérogeons à l'usage établi, et nous permettons à tous les anciens lauréats de participer à l'épreuve de cette année. Ce concours comprend une épreuve écrite et une épreuve orale, sur le sujet suivant qui est imposé à tous.

— Displegit evel ma wellit, doare ar vuhez en ho parrez d'ar zul ha war ar pemdez; gant petra e kemer an dud ar mara peder breman, e kêr ha war ar méz; pe seurt vad ha pe seurt droug a gavit e doare-beva ho kenvroiz.

Les dix concurrents dont les épreuves écrites obtiennent les meilleures notes peuvent seuls prendre part à l'épreuve orale.

Les dix concurrents admis à participer à l'épreuve orale devront se présenter devant les membres du Jury, à Gwengamp, le 10 septembre prochain et recevront à cet effet, une indemnité de déplacement de 20 francs.

VIII. — **KENSTRIVADEG J. P. CALLOC'H** : Priz a 500 lur evit ar c'haera pezh-c'hoari, evel warlene; sellit ouz « Feiz ha Breiz » Genver 1922.

IX. — **KENSTRIVADEG AR C'HAN** a vo embannet er miz a zeu.

D<sup>r</sup> L. DUJARDIN,  
Rener ar « Bleun-Brug ».

Lennit mat. — Holl skridou ar peder kenstrivadeg kenta ha re ar zeizvet hag an elzvet a ranko beza digouezet a-benn Hanter-Eost da zivezata gant M. le D<sup>r</sup> Dujardin, président du « Bleun-Brug », Saint-Renan (Finistère).

### Kenstrivadeg Breuriez ar Brezoneg

## 1.000 lur brijou !

Priz kentan : 100 lur, da laret eo :

**PRIZ KENTAN : 50 lur** en arc'hant hag eür veaj da Wengamp, d'an 9 ha 10 a viz gwengolo, gant goueliou kaer ar Bleun-Brug. (Priz an hent-houarn, ar fréjou beva hag ar fréjou gwele a vo paet gant Breuriez ar Brezoneg).

### Deverliou ar C'honkour

I. — **Dever kentan**.

Penos en em gemerfec'h evit rei da intent d'eür bugel all eus hoc'h oad e tiefe, hen ive, rei dioustu e hano da **Vreuriez ar Brezoneg**?

Lâret a rafec'h d'ezan, evel just, petra eo ar Vreuriez, evit petra eo savet, petra a c'houlenn digant ar vugale, petra a ro d'è... hag all.

20 linenn pe wardro

50 poent.

II. — **Eil dever**.

Pehini eo ar mare-amzer (saison) a bij d'ec'h ar gwellan : ar goanv, an neve-amzer, an hanv pe an diskarr-amzer? Perak?

10 linenn

30 poent.



III. — Trede dever.

Lakat en galleg:

- 1) Bezet eveziek evel aered hag eñn evel koulmed.
- 2) Bras eo an eost, hogen, rouez eo an eosterien. Pedet eta an Otrou vit ma kaso mederien.
- 3) Sellet ouz al lili ha penôs e kreskont. Ne labouront na ne nezont ket, ha koulskoude, ar roue Salomon, en e splannder, n'oa ket gwisket ker kaer hag i.

Lakat en brezoneg:

- 1) Jesus dit à ses disciples: « Mon âme est triste jusqu'à la mort. »
- 2) Plutôt la mort que la souillure. **20 poent.**

IV. — Pevare dever. — Istor Breiz.

- 1°) En pe blâ e voe staget Breiz ouz Bro-C'hall?
- 2°) Piou a c'houarne Breiz d'ar poent-ze?
- 3°) Kaout: a) tri hano sant a Vreiz; b) tri hano duk a Vreiz. **30 poent.**

Pempvet dever. — Katekiz.

- 1°) Hon Tad Santel ar Pab, ha gallout a ra en em dromplan?
- 2°) Ar gristenien, pa gommunont dindan ar spes a vara, hag int a resev kement hag ar veleien pa gommunont dindan ar spes a vara hag a win?
- 3°) Petra a ve da brepart en eñn ti pa ve roet Sakramant an Nouen d'eun den klanv? **30 poent.**

Lennet piz

- 1. — Ar vugale o do renket ar gwellañ o deveriou a vo roet d'ê eur poent bennag ouzpenn. Ariene, e resevis labouriou hag a oa diés bras da lenn o vean ma oant skrivet fall-tre. En han Doue, bezet eun tamm true ouz an hin a renk lenn an holl deveriou ka skrivet eus ho kwellañ. Er blâ-man, ma ve deveriou skrivet re fall, ne lenn ket anê.
- 2. — N'o do prijou nemet ar vugale o do roet o hano da Vreuzier ar Brezoneg arôk ar 15 a viz Gouere.
- 3. — Lakât siklêr, en penn pep dever, — ha nan er fin, — an adres pnn-da-benn, da lâret eo, an hano, al lezhano, ar skol a heullhet, kristen pe laik, da vihanan ma heullhet c'hoaz eur skol bennag.
- 4. — An holl labouriou a dleo bezan en em gavet ganin, da zivezata, abenn ar 15 a viz Gouere. Kas anê d'an adres-man: **Monsieur l'abbé Cocaign, Pleumeur-Bodou (Côtes-du-Nord).** Laket a-ziavêz d'ho lizer ar c'homzou-man: **Breuriez ar Brezoneg.**
- 5. — N'ankouaët ket lakat eun timbr-post war ho lizer. Ne gemerint ket al lizerou na vefont ket timbret.
- 6. — Diou vanniell **Breuriez ar Brezoneg**, hinî ar bôtred ha hinî ar merc'hed, a vo roet d'an dlou barrouz o do grêt ennê ar vugale ar gwellañ labouriou.

Priz « Koulmig Arvor »

Ar priz-man neve savet en enor d'ar Vreizadez vat ha kane- rez flour Pilomena C'goret (Doue d'he fardeno!) vo kinniget hep blâ, gant gouelbou ar **Bleun-Brug**, d'ar bôtred ha merc'hed yaouank etre 14 hag 20 vlâ et ermêz eus **Breuriez ar Brezoneg** hag ive d'ar bôtred ha merc'hed ha n'int ket bet enni.

Er blâ-man vo rannet evelenn:

<b>Dek priz a vo :</b>	
Priz kentan.....	60 lur
Ell priz.....	40 lur
Trede priz.....	30 lur
Pevare priz.....	20 lur

Ar c'houec'h a vo warlerc'h o do peb a 20 real ha peb a levr brezonek.

Setu, warlerc'h, ar zoniou zo da zeski ha da bliou kas o hanoiou, ar re a garo kemer perz er c'honkour, da:

**M. l'abbé Le Du, vicair, Guingamp.**

**ALL. — Etre pôted ha merc'hed Goleo Kerne ha Tregor (Eskopti S'-Brieg) e vo ar priz er blâ-man.**

Piou bennak a gar kanan, prenet :

**SONIOU FEIZ HA BREIZ :**  
8 real al levr

**MOUEZ MENEIOU KERNE :**  
18 real dre ar post.

**KANAOUENNOU AR BLEUN-BRUG :**  
22 real dre ar post

**BLEUNIOU YAOUANKIZ (AR YEODET) :**  
20 real dre ar post

Administration Arvorig, 15 rue des Capucins, Guingamp, c/c 44-88 Rennes.


**FEIZ HA BREIZ HA KROAZ AR VRETONED**

**HAG AR C'HORN-BOUD**  
(Kelaouenn viziell gant skeudennou)

Abonnement : Bretagne, 8 fr. — France, 9 fr. — Etranger, 10 fr.  
Administration : F. GEORGELIN, 4, rue du Château, Brest  
C/C 44-40, RENNES

Lenn, p. 12 ar golo, embann ar c'helaouennou all.





## Congrès du Bleun-Brug de Guingamp

8, 9, 10 septembre 1925

Sous la haute présidence de S. G. Mgr Serrand,  
Evêque de St-Brieuc et de Tréguier.

### PROGRAMME

**LUNDI 7**, à 18 h. — Ouverture de la retraite-congrès par M. l'abbé J.-M. Perrot, Directeur de *Feiz ha Breiz*. Exercices de la retraite et causeries par M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire de Saint-Brieuc.

**MARDI 8**. — 6 h. 1/2. Méditation.

7 h. Messe.

9 h. Sermon.

10 h. 1/2. Causerie sur les Conférenciers populaires bretons, sous la présidence de M. A. Bocher, de St-Servais.

12 h. Repas en commun.

15 h. Sermon.

16 h. Causerie sur le théâtre populaire breton, sous la présidence de M. J. Maréchal, vicaire de la Cathédrale de Vannes.

18 h. 1/2. Prières et Salut du T.-S. Sacrement.

19 h. Souper.

20 h. 1/2. Allocution bretonne par le conférencier populaire « Ar Yeodet ». Conférence par M. G. Le Douarec, de St-Brieuc: *Valeur économique du mouvement breton*.

*Braoan merc'h ar barrouz*, saynète comique de M. l'abbé J. Le Bayon, interprétée par la Troupe de Prat.  
Ar « Chiminaou », pièce en 2 actes, par D. N. D.

**MERCREDI 9**. — 7 h. Messe de communion à la basilique. Sermon par M. l'abbé Coetneur, Directeur au Grand Séminaire de Vannes.

9 h. Séance d'étude. — Compte-rendu annuel du président.

1° Organisation régionale du *Bleun-Brug*. Rapport de M. l'abbé Brochen, Directeur au Grand Séminaire, président du *Bleun-Brug* régional de Tréguier-Goelo.

2° *Breuriez ar Brezoneg*: sa nécessité, son programme. Rapport de M. l'abbé Coccain, vice-président du *Bleun-Brug* régional de Tréguier-Goelo.

12 h. Repas en commun.

14 h. 1° Les revendications bretonnes et la manière pratique de les faire aboutir. Rapport de M. Ollivier Chevilloite, de Brélès.

2° Les droits de la nationalité et les droits de la famille, rapport de M. Achille Glorieux, de Roubaix.

20 h. 1/2. Représentation bretonne, *Kerenor*, drame historique en 3 actes, interprété par la troupe de Bourbriac. Entr'actes: Mélodies bretonnes.

**JEUDI 10**. — 8 h. Grand'Messe solennelle à la basilique.

9 h. Concours divers: chorales, déclamation, éloquence, lecture, etc.

11 h. 1/2. Banquet.

13 h. Cortège historique représentant l'entrée de la duchesse Anne à Guingamp. Défilé des drapeaux armoriés et des anciens costumes de la région Tréguier et Goelo.

14 h. Grande séance à la Salle municipale.

*Santez Trifina*, pièce en 3 actes, de M. Joanno, interprétée par la troupe de Belle-Isle-en-Terre, sous la direction de l'auteur.

Dans les entr'actes, exécution des morceaux couronnés.

16 h. 1/2. Proclamation des lauréats des divers concours.

17 h. Clôture du XV<sup>e</sup> Congrès. Salut du Saint-Sacrement à la basilique de Notre-Dame.

\*\*

DEIOU BRAS BREIZ. — Pôtred yaouank, ha c'houi holl hag a fell d'ec'h rei an dorn, da lakaat amzer da zont hor Breiz da veza ïaouennoc'h eged an amzer-vreman, bezet holl e Gwengamp d'ar 7 a viz Gwengolo a zeu ha chomet eno betek ar yaou da noz. 15 lur 10 gwenneg benn-dez hepken ho pezo da baea, evit beza digemeret dreist e skotach Itron Varia wir zikour; jistr ha gwinn ho pezo bep pred ha kafe da lein ha da verenn; en amzer-man, evit ken nebeud all, ne c'hellet ket beza digemeret koulz e nep lec'h; rak-se 'ta kaset hoc'h ano, ar c'henta 'r gwella, d'an O. Clerc, Administrateur d'*Arvorig*, 15, rue des Capucins, Guingamp.

# KONKOUR KOULMIG ARVOR (Kân)

Goulnnet e vo digant pep kaner ha kanerez unan eus ar zoniou-man hag, ahendall, ar zon vrezonég a garo, betek ma vo dereat.

200 lur brijou

## PA DEUY AN HANV

M. M. ♩ = 110

N'eun draoui-enn a Ger - ne, Lou - re - di  
 ra di - ra la li - re - di, N'eun draoui-enn a Ger -  
 ne, E - man ma c'ha - ran - te, E - man  
 ma c'ha - ran - te O ! o ! E man ma c'ha - ran - te

## AR VILINEREZ

Andantino ♩ = 84

Ma zud a oa mi - li - ne - rien, Ma  
 zud a oa mi - li - ne - rien, E mi - lin Gwra-c'hic  
 an draou-ien, war vor - dig an e - ne - zenn, E  
 mi - lia Gwra-c'hic an draou-ien war vor - dig an dour

## AR GOULMIG DILEZET

M. M. ♩ = 100

En oabl glas an heol a lin - tre la  
 la ! En oabl glas an heol a lin - tre ; en oabl glas an heol  
 a lin - tre, En tour ar c'hlei-er a ga - ne.

## MESAEREZ AR MENE

Tempo di marcia ♩ = 112

Ouz troad ar me - ne e sav drant, ouz troad ar  
 me - ne E sav drant, Lo - chen - nig plour ma  
 dou - sig koant, Dou - sat eo ar ga - ran - te ! Da  
 veu - li he du - di bem - de, Ka - nomp gè !

## MINOREZ PENN-AR-ROZ

Andantino

Fur chet am eus pe - var gan - ton Fur-chet am  
 eus pe - var gan - ton O klask eur pla - c'hig a fe - son  
 youp youp la - ri don don la ran tra la li - re  
 youp youp la ri don don la ran tra la li - re

### PA DEUY AN HANV

Neun draouienn a Gerne,  
Louredira dira la liredi,  
'Neun draouienn a Gerne,  
Eman ma c'harante,  
Eman ma c'harante,  
O, o!  
Eman ma c'harante.

Eur plac'h fur ha dispar,  
Labourerez douar  
Triouec'h vlà oa Monig,  
Pa c'honeas Yannig  
Eun devez o foennat,  
E prajeier he zad...

(Ar peurest e *Mouez Meneou Kerne*, p. 40).

### AR VILINEREZ

Ma zud a oa milinerien,  
Ma zud a oa milinerien,  
E Milin Gwrac'hig-an-draouienn,  
E Milin Gwrac'hig-an-draouienn,  
War vordig an dour.

'N eur vilin goz, leun a zudi,  
A levenez, a goantiri.  
Dal ma tarze an heol veure,  
Er vilin e teue buhe.  
He muzik flour, hed an devez,  
A luskelle ma levenez...

(Ar peurest e *M. M. K.*, p. 79-80).

### AR GOULMIG DILEZET

En oabl glas an heol a lintre, la! la!  
En oabl glas an heol a lintre;  
En oabl glas an heol a lintre,  
En tour ar c'hleier a gane;

A gane, gant al lapoused,  
Eun devez a evurusted;  
Eured diou galonig dener,  
Diou rozenn a neve amzer;  
Diou rozennig karget a c'hliz,  
E kreiz gened o yaouankiz.

(Ar peurest, e *M. M. K.*, p. 135-136).

### MESAEREZ AR MENE

Ouz troad ar mene e sav drant,  
Lochennig plouz ma dousig koant;  
Dousat e  
Ar garante!  
Da veuli he dudi bemde,  
Kanomp gê!

'N eul lec'hig koant, flour ha didrous,  
Lec'h ma kân noz de al lapous.

Bemde, war ar roz alaouret,  
Ec'h a da vèsa he denved.

(Ar peurest e *M. M. K.*, p. 131).

### MINOREZ PENN-AR-ROZ

Furchet am eus pevar ganton,  
Furchet am eus pevar ganton,  
O klask eur plac'hig a fêson;  
Youp, youp, laridondon  
Laram tra la lire  
Youp, youp, laridondon  
Laram tralalire.

Eur plac'hig fur ha didamall  
Eur plac'h yaouank a c'hiz gwechall.

E Penn-ar-Roz, war a glevan,  
Eman an hini a glaskan.

Nag e kollfen amzer ha poan,  
Fenoz d'he gwelet mont a ran.

(Ar peurest e *M. M. K.*, p. 154).

♦♦

*MOUEZ MENEOU KERNE*: e gwerz en ti *Emgleo Sant Iltud*, 4, rue du Château, Brest — hag en *Arvorig*, 15, rue des Capucins, Guingamp. Braoan levr Soniou grêt e brezoneg Treger ha Kerne: 18 real dre ar post.

## Eured Janedig

Deut an de... Dever en dud yaouank. Ne glever nemet sutelladenn ac'han, kanaouenn alese, ha ne oa marmouz er bourk ha na ouie kanan ar zon a oa bet savet da Janedig gant tud yaouank, pôtrez ha merc'hed ar barrouz, en ti-nean.

Ar bagou n'int ket et d'an ôd: eured ôtrou Leskorr, goul-berz!

Dek eur. Ar c'hleier d'an daou dôl (1) a gan seder en tour iliz parrouz Lokirek. Holl dud ar bourk a zo renket war an hent.

Karronz bras ar marc'heg a diskenn ar c'hra: Janedig a zo e-barz gant he zad hag he mamm. An ôtrou Leskorr a zo en eilved gant e vamm, an itron goz. Tri garronz all, leun a ôtrone hag a itronezed, a deu war-lerc'h; war varc'h ar vererien gant o gwraze, ha pelloc'h, war-lerc'h c'hoaz, war droad, pôtrez ar c'homananchou hag ar C'herneveded, kerent ar brigadier, gant o mestrennou (2) mezer, o brageier berlinj glas hag o c'hamachou kanab ha pitouilh.

Skoret ar c'harronzioù e-tal dor ar vered, sparlet an nor gant ar vugale. Tud an devez, herve ar c'hiz, a ranko gor-toz ma vo savet ar spart drêz, ha paeet o gopr d'ar sparlerien.

Koant meurbed e oa Janedig o tiskenn eus he c'harronz: ar merc'hed a zifonse gant an erez.

— Sell, eme homan, ouz he lostenn zei, sell ouz he gouledenn arc'hantet!

— Sell ouz he mouchouer zei! eme eben. E c'harlantezenn, ledan evel ma dorn, a goue beteg an douar... Ha war he fenn, sell, eur gornetenn dronset dantelezet, ar gaeran am eus bischoaz gwelet.

— Netra ken koant hag ar boutouigou martellet a zo en he zreid! eme unan all. Hag ar chadenn aour a zo en he c'herc'hen? Teir gwech a ra an dro d'he gougl!...

Paour kêz Erwanig!... Daoust hag e zonz a oa deut er beurevez-ze war evor Janedig?... Daoust hag?... Mes abalamour da betra lakât da vevan, en spered an dud evurus, mennoziou ken chifus?... Erwanig a zo pell pell, du-hont, war ar mor...

Keit ha ma hijent, en-dro d'ê, ar mennoziou-ze, ar sparlet drêz a stoufe dor ar vered a zo koueet. Dor-da! an iliz a zo frank digor; war an ôter vras, ar goulou koar a luc'h; an ôtrou person, ar c'hure, ar zakrist hag ar c'holisted a zo o c'hortoz...

... Eureujet Janedig. Tanveet he deus ar bara hag ar

(1) D'an daou dôl, à la volée.

(2) Mestrenn, paletot de campagnard.

gwin a zo bet kinniget d'ei gant diou dimezell, en distro eus an iliz, war droad ar groaz.

Tud an devez a zo et da Gervarker: eno e vefont pell diouz ar bourk, eno e c'hallfont dibri, evan, kanan, dansal, eno ne vo ket warne bantet lemm ha goaper daoutagad ar bourkiz.



Goude kreiste, er bourk hag e Pennenez tud trefuet meurbed. Ar bôtred yaouank a deue, ac'h è dre aman, dre ahont, eus an eil ti d'egile.

— Dont a refet emberr da Gervarker?... Digaset pep-hini ganec'h ho kerniel-boud, ho pilligou-arem... Deut emberr da valarjea.

A-rôg an abarde, ar bourk a oa leun a dud diwar mez, deut gante pilligou, taboulinou, bombardou ha biniou: pevar zac'h-biniou, c'houec'h bombard, tri daboulin, ha n'ouzon ket ped pilligou-arem ha ped korn-boud.

Ar zonerien a oa bet unanet gant Bilzig hag ar bôtred all en osteleri, evit diski ar zon grêt da Janedig. Peb a werennad mat a win-ardant o deus bet, evit lakât en o c'halon nerz ha laouenedigez evit c'houean er biniou, skei war an taboulinou. Disket gant ar zonerien an ton hag ar zon.

— Alo! alo!... Eomp breman da valarjea, da valarjeal... Bilzig gant eun toullad pôtrez all a hencho ar bagad.

Tremenet Pennenez ha Keraudren. Kent arruout gant maner Kervarker, ar zonerien a reas eun diskuizadenn a-rôg an arvest.

— Da gentan e vo kanet an Hini goz troet en Hini koz; d'an eilved, Son Janedig! a gemennas Bilzig.

Pa arruas ar zonerien en Kervarker, an hent bras, ar c'hleuniou, al fiorzou, tro-war-dro, a oa leun a dud, deut eus a bep korn ar c'hanton, deut evel just da valarjea. Darn, pôtrez bajanek (1) pe merc'hed divaoue (2), a grede penôs e oant bet, en gwirione, pedet da valarjea, da evan jistr, da dibri gwadigennou ha rost-kandadenn (3). An darnvuian a oa deut evit o flijadur, evit kanan, dansal, youc'hal, ober trouz ha jolori: jalivari.

(Da heuilh).

(1) Bajanek, peu fin, peu dégourdi.

(2) Divaoue, inintelligent.

(3) Rost-kandadenn, fibres du lard dont on a extrait la graisse qui fait le saindoux.



## Pirc'hirinaj pôtrede Eskopti Sant-Brieg en Lourd (20-25 ebrel 1925)

Eun dra ha ne voe biskoaz gwelet c'hoaz en hon eskopti a zo c'hoarvezet er blâ-man: Eskob Sant-Brieg en Lourd gant pôtrede e eskopti.

An ôtrou 'n Eskob, aketus bepred da glask ar stumm wellan da ober vad d'an ineou ez eo karget anê, en deus savet eur pirc'hirinaj neve evit ar bôtred. Eur galv a reas en eul lizer entanet, skrivet gant eur garante divent evit Doue, evit ar Werc'hez, evit an ineou. En holl barrouziou e voe, dre e urz, lennet al lizer-ze hag embannet evelse ar pirc'hirinaj.

Na voe ket en aner; d'an 20 a viz ebrel, daoust d'ar brez labour a oa war ar mêz, d'ar poent-ze, daoust ive d'ar votadeg ken tost, 1.400 gwaz, 1.400 breton a gemere laouen an tren evit mont d'ar penn-all d'ar Frans da lâret d'ar Werc'hez dinamm, da Itron-Varia-Lourd, o c'harante, o fianz hag o ezommu.

Re gaer eo bet ar pirc'hirinaj-ze, re a vad en deus grêt en pep stumm d'ar re o deus kemeret perz ennan evit gallout tremen hep lâret, diwar e benn, eur gerig berr en hon c'helaouennig!

\*\*

Daou drên a dlee kas da Lourd ar birc'hirined. D'al lun vintin, hon trên-ni, trên ar Vretoned, pe c'hoaz an trên ru, a guitaas Lanuon da nao eur hanter. Betek Sant-Brieg, hiniennou a zave ennan en pep gar. Da c'houde, ez ejomp war eun en eur bedi, en eur ganen, en eur gountan marvailhou ive, rak eur pirc'hirinaj, ma n'eo ket eur veaj a blijadur n'eo ket kennebeut eur veaj a dristidigez. D'ar meurzh vintin, da unnek eur, en em gavjomp en bro ar Werc'hez hag arôk en em gaout, pa zantjomp edomp tost-tost da Lourd, eur « Magnificat » kanet a bouez o fenn gant 600 breton a lâras da Vari e oa arru eur wech ouspenn d'he gwelet bugale Breiz-Izel.

Glao a rê, nan a-bil met hep paouez. Ne davas ket, zoken epad an abarde. Met, daoust d'ar glao, an holl a yeas da diou eur en prosesion eus an Iliz parrouz d'ar « grotten » da ober d'ar Werc'hez ar weladenn gentan. Daoust ha Bretoned o deus biskoaz kulet dirak eur bannac'h dour?

« Kement-man a zo nebeut a dra, a lâras unan en eur vont, en kichen ar pezh hon deus gwelet en trancheou ». « Evelhen, da vihanan, eme eun all e-tal ar grotten, e welo ar Werc'hez hon bolonte vat hag hon devo hon mennad diganti kalz buanoc'h. »

Eus krec'h kador-brezeg ar « grotten », an Otrou 'n Eskob a roas e urziou, berr ha berr met frêz ha sklêr. « An holl aman, emezan, o deus o zellou warnoc'h. Fe ar Vretoned a zo brudet er bed a-bez. Grêt en hevelep stumm ma lâro pep hini en eur welet ac'hanoc'h: « Mat! Gwelloc'h eo c'hoaz ar Vreiziz evit ma sonjen! »

Ho! bezet dinec'h bras, ôtrou 'n Eskob. Pirc'hirined Lourd a vo sentus evit ober d'ec'h plijadur, evel just met dreist-holl, evit rei d'ar Werc'hez eun testeni eus o gwir garante ha d'ar gwener ar beure, en eur guitât ar grotten, e c'halfet lâret en gwirione: « Hoc'h Eskob hag a zo ive ho tad a zo lorc'h bras ennan gant e vugale. Biken, daoust ma anavezan koulskoude ho fe grenv, n'am ije kredet sonjal e vijec'h en em diskouezet aman kerkoulz kristenien. Trugare d'ec'h!... ha ra zikouro ar Werc'hez ac'hanoc'h da vezan en ho parrouziou ar pezh oc'h bet aman en he c'hichen. »

D'ar meurzh d'abarde, e krogas ar retred, — rak eur retred eo o deus grêt ar bôtred en Lourd; — an Tad Henry, eur Jezuit, eo a brezege. Netra nemet ar gwel eus an Tad-ze hag hanver dre holl elec'h ma tremen, ar Zant, a c'honeas buan an holl galonou. Hag e gomz neuze! Oh! pebez komz c'houek, pebez komz entanet! Biken ni hag hon deus e glevet ne ankouafomp anean; biken ive ne yelo eus hon spred an daou c'her a lâras en hon yez, en brezoneg, e kreiz diou zarmon c'hallek: « Doue arôk ha ni warlerc'h! » « En em gailhari, biken! kentoc'h mervel! »

\*\*

N'am eus ket a amzer, siouaz, da gountan, penn-da-benn doare ar retred, doare ar pirc'hirinaj. Eur ger hepken eus prosesion ar Zakramant.

Prosesion ar Zakramant en Lourd! Na gredan ket e vefe war an douar netra all kaeroc'h, netra ive hag a c'half plijout gwelloc'h da galon hon Zalver; netra muioc'h gouest da grenvat ar fe, netra hag a lak mui a c'hrasou da zisken eus an Nenv! Gant pebez fe, gant pebez karante, gant pebez fianz e kêr, e kri kentoc'h, a-bouez o fenn, ar birc'hirined: Hosanna, hosanna, meulodi, meulodi da Vab Doue! Jezus, Mab David, ho pet true ouzin! Otrou, grêt ma welin! Otrou, grêt ma klevin! Otrou, grêt ma kerzin! »

Hag en Lourd, tra souezus, ar glanvourien, elec'h bezan pep hini evitan e-unan, evel ma c'hallfed kredi, a bed an eil evit egile. Darn, zoken, hag a c'houzanv koulskoude poaniou skrijus, a ve klevet o lâret a greiz o c'halon: « Jezus, Jezus, lezit ganin ma foan. Laket kentoc'h ar pec'her-man-pec'her eus ma c'herent, eus ma mignoned, da dizrei diouz e vuhe fall ha da anaout ac'hanoc'h! »

Ha bez' e zo eun dra bennag kaeroc'h? Pesort mirakl a zo brasoc'h evit ar mirakl-ze ha re wel ket an daoulagad?



Met setu hir awalc'h ma fennad! Eur ger c'hoaz, eur ger hepken! Ar brezoneg na voe ket lezet a-goste en Lourd. D'ar merc'her vintin, an Otrou Pennec, ar vikél-vras, a reas d'imp, en brezoneg, eur brezegenn gaër: « C'houi holl aman, emezan, a oar reiz ar galleg, reisoc'h, marteze, evit ar re na ouïont nemet ar galleg, met goût a ran e ra eur vad divent d'ar « Breton » klevet komz, dreist-holl ermêz e vro, yez e dadou koz, ha setu am eus sonjet lâret d'ac'h eur ger en brezoneg! »

Ha neuze a reas eur zarmon dispar! Red e vefe lakat anezi aman penn-da-benn, rak ar pez a c'hallfen diverrat na vefe nemet eur skeudenn disliv eus ar pez a glevjomp.

D'ar merc'her da noz, goude ar « grede », eur vouez ana-veet mat, eur vouez krenv ha skiltrus a youc'has: Ar Vretoned a zo pedet d'en em vodan en harz treid ar Werc'hez kurunet da ganan ar pedennou diouz an noz! »

Kerkent, an holl a diredas ha neuze, en hon yez koz, e savas 'trezek an Nenv ar pedennou. Oh! pebez sonj vat ho poa bet eno, Otrou Trocquer! Evurus e oamp en ho kichen. Sonjal a remp e oamp e kreiz mêziou sioul Breiz-Izel o kanan, goude eun devez bras, meulodi da Zoue ha d'ar Werc'hez Vari.

O brezoneg karet, yez dispar, biken ne varvi! Ar Werc'hez venniget a zikouro ac'hanomp d'az miret. Eun dra bennag a vankfe en Lourd ma n'hallje ken ar Vretoned kanan, en o yez, enor ha gloar o mamm!

Evidon-me a gan alies komzou ar c'hantik gallek a gan ar pirc'hirin pa guita ar « grotten » :

Distrei c'hoaz aman a refomp;  
Ar fianz-ze holl a viromp,  
Rak d'ar « grotten » mont da bedi  
A zo ken mat, Gwerc'hez Vari,  
A zo ken mat, ken ma ouelomp!

EUR PIRC'HIRIN.

## SANTEZ TRIFINA

Pez da c'hoari gant merc'hed yaouank

Gant an Otrou JOANNO

### DIVIZ VII

TRIFINA — BAZVALEN

BAZVALEN (*a zo deut ebarz hep bean skoet war an nor*).

Iskuzet ganin, mar plij, prinsez Trifina, mar 'm eus kredet dont, ac'hanon ma unan, 'n ho petek, da zigas d'ac'h eur c'hefridi digant ma ôtrou galloudus meurbed ha brudet bras, Konomor, kont a Boher.

TRIFINA

Azeet 'n ho koaze, itron! Hag iskuzet ganin, d'ho tro, mar kredan ive lâret d'ac'h n'am eus biskoaz digemeret kefridi digant den ebet, hep goût d'ar c'hont Gwerok, ma zad, ha d'ar gontez Yoland, ma mamm.

BAZVALEN

Ma n'am eus ket grêt ervat o tont aman war ma fien, tamallet, mar plij, d'an nebeut anaoudegez am eus eus doareou an dud a renk uhel.

TRIFINA

Me ne damallan, na ne veulan.

### DIVIZ VIII

TRIFINA — BAZVALEN — YOLAND

BAZVALEN

Iskuzet ganin, itron, ma welet ac'hanon o kôzeal aman gant ar brinsez, ho merc'h! Karget e oan gant ma Otrou Konomor, kont a Boher, da zigas d'ei eur c'helou dudius, hag e oan deut war eün 'n he fetek, hep zonzal droug ebet.

YOLAND

Ma merc'h, yaouank c'hoaz, na c'houlfe biken chilaou diouz den e kuz ouz he zad hag he mamm.

BAZVALEN

Ne oan ket oc'h ésa mont e kuz diouzoc'h, itron, na diouz ar c'hont Gwerok kennebeut!! Eün hag eün ec'h an ganti, me...

TRIFINA (*d'ei he-unan*).

Gaouiaterez!

BAZVALEN

Met, hen anzav a ran, me nan on ket tuet-kaer war galz a draou a zo.

TRIFINA (*d'ei he-unan*).

O Doue! plac'h an ardou!

BAZVALEN

Ze eo d'in bean' grêt 'vel am eus grêt... Mar kavet mat, itron, ec'h an dioustu war ma c'hiz.

YOLAND

Amzer ac'h eus itron! Ha mar karet ive, ma merc'h ha me a chilaouo breman ho kefridi gant plijadur.

TRIFINA (*d'ei he-unan*).

Ne rin ket, ma Jezuz!

BAZVALEN

Ac'hanta, p' hoc'h eus ar vadelez d'am chilaou, me a zisklêrio d'ac'h penôs ar c'hont a Boher, rener an Domnone, Konomor, ma Otrou, eo, neve zo, marvet ar gontez, e bried.

YOLAND

Klevet am oa ar c'helou, itron.

BAZVALEN

Hag en dije c'hoant d'unani e vuhe hen gant buhe ar brinsez Trifina, ho merc'h, ha d'ober ganti eur gontez a Boher.

TRIFINA (*d'ei he-unan*).

Jezuz! Santez Anna! pellaet diouzin eur blanedenn evel hounnez!

BAZVALEN

Hag en deus teurveet digas ac'hanon-me, e zervijerez dister, da zigemen ar c'helou dudius-ze d'ac'h ha d'ar brinsez koant.

YOLAND

Trugare d'ac'h, Itron, ha d'ar c'hont galloudus an neus ho tigaset... An enor an neus c'hoant d'ober d'am merc'h a zo eun enor a briz uhel.

BAZVALEN

D'ean, itron, eo e vo an enor an uhelan. Ar brinsez Trifina, leun a furnez, a zo eur berlezenn hag a baro splann war gurunenn Konomor.

TRIFINA (*d'ei he-unan*).

Meulodiou dibred!

YOLAND

Bean voint o-daou, war a gredan, daou bried a zoare!

TRIFINA

Oh! Mamm ger!!

BAZVALEN

Trugare, Itron Yoland, eus ho komzou amgraüs a garg ma c'halon a joa!... Ha c'houi, ma frinsez vat, c'houi, a gredan, a zo leun ho hini a joa ive?

(*Da heulh.*)

## Eun oferenn neve e Priel

An O. Jermenn Javre, breman e skolaj Lanuon, a gane de sul ar C'hazimodo, e oferenn neve e Priel, e barrouz. Kement a oa 'oa war an tòn bras, a c'hellet kredi. Eur bobl tud a leunie an Iliz, hag endro d'ar beleg yaouank, eur bern beleien diwardro, mignonned d'ean. En o zouez, en em gave an O. Mercier, Rener skolaj Lanuon, hag an O. Turmel, Person ar Roc'h, a roas dorn da Jermenn da ober e studi ha da vont da veleg. Eur brezegenn dispar a reas en oferenn-bred. Meur a hini a skuilhe daerou, a-vec'h d'è gallout chom bep difronkal. Hag e gwirione,

Dindan eun diavêz seder,  
E kuz eur galon ken tener,  
Ma kav hent digor d'e gomzou  
Da vont e kreiz ar c'halonou.

E Priel e zo eun nebeut tud yaouank, pôtrek ha mer-c'hed, hag a zo gwell droet gant ar c'hanaouennou brezonek, eun dudi evite kanan pe glevet kanan brezoneg. E gouel « Minibriak », e oa pemzek pe c'houezek anê, herve klevet. Ha n'am eus ket a boan o kredi e oant et di, kement-se, o welet ar stad a zavas ennê o klevet unan o kanan, war dôn « Gouel Lanuon », eur ganaouenn d'ar beleg yaouank.

\*\*\*

O klevet ken skeltr ar c'hleier, holl e brall, e tu all d'ar zaon  
War he zrejou, e Landreger, digor geno Marijan:  
« Daoust, emel, peseurt neventi a vefe e bourc'h Priel!  
Tremenet eo gouel Sant Jozef; abaoue amzer a zo pell;  
Red eo d'in hen goût, koulskoude! » Hag hi, yo... gant an avel.  
'N em gaout a rês, berr kaer warni, abred gant Monig Lichenn  
Hag o diou, 'skeud eur bod lileg, d'ober eur gêzeadenn.  
Kloukan reont, da 'n em boac'hat, peb a vannac'hig kafe,  
Ha raktal, kuit da goll amzer, eur veskennad c'hoaz gante;  
Gant jigodenn, eur wech eollet, esoc'h kalz an teod goude.

*Marijan:*

Alo, Mönig, lâr d'in breman, an neventi 'zo hirie,  
Pe gouel a zo gant Prielliz, hen lâr d'in, en han' Doue!  
N'eo ket sul ar C'hazimodo, nag an terri koz podou,  
Nag an ezomm da enori, o paskan, an diodou,  
A lakfe kement ar c'hleier, da ganad d'imp kantikou.

*Mönig Lichenn:*

O Marijan, eme Vönig, n'ouvez ket ar c'helou,  
A lak hirie, e bourc'h Priel, da dridal ar c'halonou?  
Pa zav, klev, eur beleg yaouank, 'vit e ofern-bred gentan,  
Ouz an ôter d'ofernni, ec'h eo dleet, a gredan,  
Ober an treo war an tòn bras, ha zôn ar c'hleier d'ean.

**Marijan:**

Petra! Eun ofern-bred kentan! Jezuz Maria! Kredol  
Piou 'c'h eo ar beleg yaouank-ze? Me garfe goût e hano!  
Anveout a ren gwechall-goz 'pad amzer ma yaouankiz,  
E Priel an holl gristenien, bleustre bep sul an Iliz;  
Met breman, siouaz, 'n em c'hozn, n'anvean ken Prieliz.

**Môniq Lichenn:**

Breman 'zo eur flipad amzer, n'oun ket reiz awalc'h pegelt,  
A-vech d'in ma c'hallen neuze chom ma unan war ma zreid,  
En em gave, herve klevet, vel « faktor » e bourc'h Priel,  
Eun divroad, den a zoare; dont a rê a Dregastel; [rec'hel.  
Eur Vro, mar 'z eus, meurbed brudet, dre hec'h ôchou, he

Pôtr yaouank, kuit a geusteuenn, n'eo ket hounnez « jeu » ebet;  
Dre holl, eur par heb e barez, 'vit derec'h et ti ne daly ket.  
Edouard Javre a glaskas, hag abred, eur berfezenn  
A goueas warni e zellou, e Breuriez Roc'h-Véienn;  
O c'halonou start e skoulmjont, da 'r em garout, ya, laouen!

Doze a ren pep tra er bed, warné skuilhas e vennoz,  
Hag e teuas pemp krouadur da yeât ti an daou goz;  
A bemp chomet pevâr da rep, hag o mamm intanzevet,  
Goude bean daerou skulhet, ha kanvou gante douget,  
En em gav holl hirie eûrus, ha penôs ne vefent ket!

Eûrusted berr kaer koulskoude, e draonienn-man a c'hlae'har,  
E kreiz he jeu, diouz ar beure, e teu an noz d'he diskar.  
Met eûrusted ar Baradoz a zo kalz weñ eviti;  
Eno, epad an holl amzer, e vev ar zent diouff;  
En o zouez, Edouard Javre, da Zoue ' gân meulodi.

Eun tad d'e bried, rôk mervel, 'n eur vouse'hoarzin a lâre:  
« Me gred penôs 'n e varadoz 'vin arru mat gant Doue,  
Rak ma ro herve e lavar, betek kant d'e zervijer,  
Me 'lez war ma lere'h daou veleg, tra lskis en hon amzer,  
Ha kement-se ' dalveo d'in kaout ar gwellan digemer. »

N'eus ket bet Edouard Javre eur c'hras ken kaer evellân;  
Jermenn ' oa c'hoaz war ar studi pa gwitaas ar bed-man;  
Met sur mat, diouz lein an Nenvou, elec'h ma 'n em gav hirie,  
E kemer perz en o joalou ha' war zebiant, e ine  
A darnij 'us d'e vab beleg, ouz hec'h ambroug an éte.

Gwechall, en amzer Moyzez, ha ze, herve al tezenn,  
E vije, e pep liegez, kinniget gant pep perc'henn,  
Gwestlet war eun dro, da Zoue, gant joa vraz, ar mab henan;  
E ti Javre, deus ar mibien, da veleg ar yaouankan;  
Hag hirie, e ofern neve; an tón hag ar zôn gantan.

Ne ve ket grêt, gant den yaouank, eur beleg en eun devez;  
Red ' ve d'ean deski, deski pleustri pell hent ar Furnez;  
Jermenn Javre, war an hent-ze, abred a gavas skoazell,  
Skoazell ha dorn, e pep deare, digant an ôtrou Turmel,  
N'eus ket gwall beli 'zo, da berson, d'ar Roc'h kaset a Briel.

Hirie vo 'n e vield 'vel biskoaz, ha n'eo ket, nann, hep rêzon,  
Ha pa gomzo diouz ar gador, e prezego gant kalon,  
Rak ma 'n eus lies roet dorn da gâz da zeski latin,  
An darn vulan, e penn o hent, n'int ket arruet, 'gav d'in;  
Met gant Jermenn, e dôl da vat, nekuita, zo deut erdin!

**Pôtr Juluen:**

Setu, mignon, an neventi a gleven aze dioustu,  
Kontet d'in brao gant Marijan e klehen penn ar Pont-Du;  
Petra larfen me 'ta, war ze, d'ac'h ho penn c'hoaz da derri;  
Dre forz monet re d'ar stivel, teu ar besel da vrevi.  
Ha ma mouez distign he c'herden, arru ' ve eur gont ganti.

Oa ket bet aman koulskoude, nann, c'houec'h v'la warnugent 'zo,  
Eur gouel ken kaer hag ar gouel-man, ha pegoulz c'hoaz n'em [gavo!  
'Boue ofern an ôtrou Rogard, (gant Doue pell 'zo eman!)  
Nan neus ket bet a veleien, nann, siouaz, er barrouz-man...  
Dalc'het ho krog, pôtrez yaouank, c'houl war ar studi breman!

Siouaz, en amzer a hirie, ec'h eo boull ar veleien!  
'M eus aon e ver deut da gredi 'c'h eo re dreut o c'heusteuenn,  
Ha, penn-follet kalz re an dud gant ar c'hoant dastum madou,  
Ha trelâtet o fenn gante warlerc'h ar plijadurioù,  
Ne renont ken o bugale etrezek an ôterioù.

Kalz well, herve an Aviel, klask dastum ar peadra  
A gaver ar mad diwarnan, eur mad n'a ket da netra,  
Er Baradoz, digant Doue, kant 'vit unan hag ouspenn...  
Roet 'ta d'ho Mamm an Iliz, danve da gaout beleien;  
N'oufec'h ober well, Prieliz, ober well 'vel kristenien!

Mar deo stank an ed er parkou, re dibaot an eosterien,  
Hag e chom, hep bean medet, trevajou hed ar blienn;  
Roet dorn da Zalver ar bed da gargan e c'hrignolioù;  
Ne fell d'ean nemet eun dra; zalvi an holl ineou.  
Hen zikouret 'ta d'ober zent, d'o c'has gantan d'an Nenvou.

Ha breman, evit achui, kanomp gloar ha meulodi...  
Bebet! Bevet Jermenn Javre! hen lâromp holl gant dud;  
Gras d'il, ma c'henvreurig yaouank, gras da gaout digant Doue,  
Nerz ha yec'hed evel beleg, ken achuo da vuhe!  
D'az yec'hed! Yec'hed pephini! E tu-hont, mil trugare!

Pôtr Juluen.

**Buhe Breuriez ar Brezoneg**

**“ War eün bepred ”**

**AR C'HONKOUR BRAS.**

Achu eo miz even. Deuet eo, bugale, ar mare da gloza  
ar c'honkour bras. Holl, moarvad, hoc'h eus gret al labou-  
riou merket. Na viret ket anê pelloc'h. Kaset anê raktal  
d'an adres-man: *M. l'abbé Cœcain, Pleumeur-Bodou (Côtes-  
du-Nord).*



Evit ma ne vo tapet den en dilere'h, e vo digemeret an deveriou a en em gavo arôk ar 15 a viz gouere. Adalek neuze avat, gwaz a ze evit ar re a arruo. Ne vezint ket lennet zoken.

**BREURIEZ AR BREZONEG HA GOUELIOU AR BLEUNBRUG. — KELOU MAT.**

Setu aman, e berr gomzou, ar c'helou-ze:

1°) Ar bugel a c'hono priz kentan ar c'honkour bras, n'eus forz eus a belec'h e vo, a deuo evit netra da oueliou Gwengamp. N'en do gwenneg ebet da zispign, nemet c'hoant en defe.

2°) Adalek an 20 a viz gouere e tremenfomp er parrouziou eo savet enne Breuriez ar Brezoneg. Elec'h e vo, d'an nebeutan, 6 bugel er Vreuriez, e refomp eur c'honkour lennadeg (lenn eur pennad brezoneg ha takat anean en galleg) etre ar vugale. Elec'h e vo eus 6 da 15 o kemer peurz er c'honkour, an hini kentan a yelo gant *nebeut* a frêjou (evit netra zoken marteze), da oueliou Gwengamp; elec'h e vo eus 15 da 25, an daou gentan; hag elec'h e vo eus 25 da 40, an tri gentan.

3°) Evit ar re-all holl a zo en Breuriez ar Brezoneg, ne gousto ket gwall ger kennebeut. Ar veaj o do da baëan, evel just, mez en Gwengamp e vezint digemeret en hevel stumm ma n'o do nemet frêjou dister.

Gwelet eta, bugale, e c'hallo meur a hini ac'hanoc'h dont da oueliou ar Bleun-Brug hag eno e vo adarre prizioù da c'honit.

Da gentan, bez' e vo etre bugale Breuriez ar Brezoneg hepken eur c'honkour lennadeg: ar priz kentan a vo 50 lur.

D'an eil, eur c'honkour kaniri a vo ive, « Konkour Koulmig Arvor », hag aman bugale Breuriez ar Brezoneg a c'hallo ive, mar o deve moueziou kaër, gonit prizioù neve.



C'hoant hon deus, bugale, da ziskouez d'ec'h pegement e karomp ac'hanoc'h, pegement a c'hoant hon deus da ober d'ec'h ha vad ha plijadur.

Hast hon deus da vont d'ho kwelet d'ho parrouziou. Neuze, a vouez uhel, e lartomp d'ec'h petra eo red e vefe adalek breman ar vreuriez hoc'h eus roet d'ezi hoc'h anoù.

Klevet a refet, en eur stumm bennag, pesort de e tremenfomp en ho parrouz. En de-ze, lâret d'ho kerent lezel ac'hanoc'h holl da zont d'ar bourc'h. Ne vo ket amzer gollet.

*Mignon ar vugale.*

**Institution Notre-Dame. — Les Capucins**  
GUINGAMP

L'INSTITUTION offre aux familles, avec une éducation chrétienne :  
Un cours de LATIN préparant au Grand Séminaire et au Baccalauréat ;  
Un cours de FRANÇAIS avec enseignements spéciaux d'Agriculture et de Commerce ;  
Un cours de BRETON pour les élèves qui le désirent.  
PENSIONNAT & EXTERNAT

**E GWERZ : 15, rue des Capucins, Guingamp, Administration d'Arvorlg.**

Levr Buhe ar Zent : 6 fr. 50; 7 fr. 50, dre ar post. Adalek c'houec'h: 6 fr., hag ar frejou kas ouспен.

Christo' 5 fr.; 5 fr. 50, dre ar post. Diskenn-briz pa vo prenet c'houec'h war an dro. Ar c'baeran levr moulet e brezoneg.

Mouez Menelou Kerne gant Filomena Cadoret : 16 real. — (18 real dre ar post).

Kanaouennoù ar Bleun-Brug 1922 : 20 real; — (22 dre ar post).

Oberou an O. Clerc (Kloareg-ar-Wern) : Grammaire bretonne: 16 real (4 fr.); 4 fr. 60 dre ar post; — Beaj Londrez: 8 real (2 fr.); 2 fr. 60 dre ar post; — Beaj Jerusalem: 14 real (3 fr. 50); 4 fr. 25 dre ar post; — Le Breton dans l'enseignement secondaire: 15 gwenneg dre ar post.

Vocabulaire français-breton (Vallée), broché 6 fr. franco recommandé.

**BREIZIZ, LENNIT :**

- Marc'hekadenn Atepomaros, gant X<sup>e</sup>. Priz: 4 real;
- An « Notennoù diwarbenn ar Getted koz hag o sevenadur ».
- (12 levrig gant peb a c'heriadur). Priz: 8 real pep hini.
- E ti an Ao. Roux, S<sup>t</sup> Hélyor, Perdic (C.-du-N.).

Pommiers à Cidre

Arbres Fruitiers  
Forestiers  
et d'Ornement

J. LIBERGE

Horticulteur - Pépiniériste

RUE SAINT-NICOLAS

GUINGAMP R. C. 611

Plantes à fleurs & à feuillage | Graines potagères & fourragères

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peuz lennet  
o embann en « ARVORIG »

Maison de Confiance réputée comme vendant Bon Marché

R. E. Seine n° 36.204  
R. C. Guingamp n° 352

AUX

Téléphone 29

# DAMES DE FRANCE

35-37-39, Rue Notre-Dame, 35-37-39

— 0 — GUINGAMP — 0 —

## TOUS LES TISSUS

Vêtements pour Dames et Messieurs

== CHAUSSURES ==

Meubles - Ménage - Chauffage

» ARTICLES DE PARIS «

Dépositaire de la Bicyclette « La Rafale »

Rayons les mieux assortis de la Région

Envoi franco des Catalogues sur demande

LIVRAISON DANS LA RÉGION  
PAR SERVICE AUTOMOBILE

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

TÉL. 1.30

R. C. 127

## A L'ALLIANCE D'OR

Chèque postal  
3933 NANTES

Horlogerie - Bijouterie - Orfèvrerie - Joaillerie

J. LARGENTON  
GUINGAMP - 0 - 7, Place du Centre - 0 - GUINGAMP

Grand choix de Bagues  
et Bijoux or pour Mariages

ORFÈVRERIE

Gallia, Christofle, Boulenger, Ercois

CHRONOMÈTRES

Omega, Zenith, Lip, Longine, Moeris, Cyma

LUNETTES

PINCE-NEZ

Horloges et Pendules répétition  
de première qualité

Garnitures et Pendules de cheminée

Bijoux « FIX »

Carillons Westminster sonnant les 4 quarts

Grand Choix de Pipes

GBD

ATELIER DE RÉPARATIONS

Yves GOJEAN

Rustang-Guingamp

R. C. 371

Travaux de PLÂTRE  
et de CIMENT

Vente de Matériaux :

Chaux, Plâtre, Ciment

QUINCAILLERIE  
Articles de Ménage

Alain MENGUY

François ROYER  
SUCCESEUR

11, rue des Ponts-St-Michel  
GUINGAMP  
R. C. 832

LÉON

Marbrier-Sculpteur

Rue de la Trinité  
GUINGAMP

CALVAIRES  
MONUMENTS FUNÉBRES  
en tous genres

CADOUDAL-LE GALL  
BOURBRIAC

Avant tout achat de...

Téléphone N° 4

Quincaillerie, Fers, Tôle ondulée, Machines agricoles,  
Bois et Matériaux de construction, Engrais.....

R. C. Guingamp N° 1299

Consultez-nous

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

## BUHEZ BREIZ

Revue bilingue d'action bretonne

:- Mensuelle :-

Abonnement : 12 francs

Le numéro : 1 fr. 25

Administrateur : M. J. OLLIVIER,  
17, rue de Brest, Landerneau.

C. C. 3.248 Rennes

## DIHUNAMB!

Dastumaden miziek  
groeit aveit Breihiz er Morbihan  
10, rue du Gaz, LORIENT

PRIZIEU. — Un Niveren : dek  
blank. — Er Bléad : Eit Breih :  
20 real ; Eit Bro Frans : 2  
skeuid ; Eit er brôleu aral :  
7 livr.

## ÉLECTRICITÉ

Installations - Réparations  
Lumière, Force Motrice,  
Sonneries, Téléphone

### Louis LE POULLOUIN

12, Rue de la Trinité  
R. C. 2873 GUINGAMP

## MONUMENTS FUNÉRAIRES

### AUFFRAY

Marbrier - Sculpteur

48, rue Saint-Nicolas, 48

— GUINGAMP —

R. C. 801

Succursale à PAIMPOL

## Louis LAVANANT

### Ornements d'Église

Rue Joseph Morand

— LANNION —

R. C. 373 Lannion.

## Veuve Pierre HAMON

BOIS DE CHAUFFAGE  
:: CHARBONS ::

Sabots - Chaussures - Chaussons de Strasbourg

31, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP :- R. C. 34

## FABRIQUE DE PARAPLUIES

CANNES - OMBRELLES

Réparations - Recouvreages

### M<sup>me</sup> RUELLAN

15, Place du Centre, 15

R. C. 406 - : GUINGAMP

## UNION AGRICOLE

GUINGAMP R. C. 618

a bren avalou-douar  
a bep sort.

## Chaussures en tous Genres

### A. QUEILLÉ

47, - Rue Notre-Dame - 47

R. C. 732 GUINGAMP

Sabots en gros :- Réparations

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

## EMILE MONJARRET

Place Saint-Sauveur — GUINGAMP

FABRIQUE de MEUBLES de STYLE, BRETONS et MODERNES

Chêne, Noyer, Acajou, Bronze, Miroiterie

TRAVAIL GARANTI

PRIX MODÉRÉS

### Coutellerie LALÈS

5, Place du Centre - GUINGAMP

Repassage, Réparations tous les jours

Travail soigné, garanti

### V. CARON

COIFFEUR-PARFUMEUR  
GRIMES POUR SEANCES

Salon de Dames

Ondulation - Shampoings - Manucure

23, rue Notre-Dame — GUINGAMP

Restauration de Meubles de tous styles  
Meubles Bretons

### Eugène LEMIEUX Fils

Rustang — GUINGAMP

Meubles neufs et d'occasion

### LONGERÉ-SOUDER

46, rue Notre-Dame — GUINGAMP

Epicerie — Spécialité de Cafés

VINS

QUINCAILLERIE

## TEINTURE - NETTOYAGE - APPRÊTS

Deuil en 24 heures

### J. AUNEAU

45, rue Saint-Yves — GUINGAMP

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet  
o embann en « ARVORIG »

R. C. 778

R. C. 416

R. C. 392

R. C. 34

R. C. 447

R. C. 533

R. C. 404

R. C. 506

## FABRIQUE DE PARAPLUIES

Anciennes Maisons DUFOR et LÉMEILLET

GROS **Yves MARTIN** DÉTAIL  
SUCESSEUR

CANNES -- RÉPARATIONS -- RECOUVRACES  
GUINGAMP -- Place du Centre -- GUINGAMP

## Ti an dimezel **KERALUM**

6, rue Ru Rohan, **SANT-BRIEG**

e kaver **LEVRIOU** ha **PAPER** a bep stum :

levriou war ar Vro

levriou oferen brezonek pe gallek

levriou war ar skritur-zakr, ar fe,

al lidou-zakr, ar brezegerez, an istor,

an ilizou kaer ha reo-all

Kement tra zo ezomp evit moullan keloennou :  
mekanikou, paper, liou.

Téléph. 2-58.

R. C. St-Brieg 4151.

## HOTEL DE LA GARE GUINGAMP

**M. SIREY, Propriétaire**

CHAUFFAGE CENTRAL -- ELECTRICITÉ

SERVICES PAR PETITES TABLES

Téléphone 19

R. C. 3010

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lenñet  
o embann en « ARVORIG »

ERS - CHARBONS - FONTES

## ARTICLES DE MÉNAGE

Quincaillerie

**Y. FILOUX**

34, Place du Centre, **GUINGAMP**

Grand choix de **FOURNEAUX** de tous modèles

## Chapellerie

DÉTAIL

Écossais

UNIFORME

**E. PLAIRE Fils**


29, rue des Ponts-Saint-Michel

**GUINGAMP**

R. C. 395

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man,  
o embann en « ARVORIG »





an keloennou :

# SOCIÉTÉ GÉNÉ

R. C. St-Brieg 4151.

pour favoriser

ement du Commerce et de l'Ind

## HO

ANONYME, CAPITAL : 500 MILL.

## GARE

à **GUINGAMP**, 32, Place du Centre

BUREAUX PERMANENTS ;

**M LANNION — PAIMPOL — TRÉGUIER**

BUREAUX AUXILIAIRES :

**erros-Guirec — Pleubian — Pontrieux — La Roche-Derrien**

opérations de BANQUE et de BOURSE. — Dépôts de fonds à vue et à échéance fixe  
Télépho ent et Escompte des Bons de la Défense Nationale

Ma brenet eur

erez ar C'hazetennou Katolik. ru ar C'hastell, 4.